

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

Paotr an deñved

Ni a zo daou zen yaouank, e parrez Sizun ganet
Pa 'vedo ar bleuñv er gwez ha balan alaouret

Euz ar mintin pa saven e kleven ar mouilc'hi
O sutal hag o kanañ oc'h ober o neizi

Hag ur rossignol bihan war gornig va frenestr
Lavar din paotrig yaouank setu da blanedenn

Te 'ranko kuitaat da vro, da dour dantelezet
'Vit mont war ar menez bras da ziwall an deñved

Me n'am boa ket pemzek vloaz pa guitaen va farrez
Laret kenavo d'am zud 'vit komañs va micher

War glizhenn vras ar mintin, leun bikoù ar stered
Me 'glev' ur mouez o ouelañ en tu all d'ar menez

Petra berjeleñ yaouank a dourmant da galon
Kollet am eus emezi va fidelañ mignon

Va c'hi Turk en va c'hichen 'zo 'tost eus a vervel
Penaos e rin-me bremañ evit diwall va loened

An deñved barzh ar blaenenn 'zo en dañjer ar bleiz
Ha me berjeleñ yaouank en dañjer noz ha deiz

Pokad a ran d'he dornig evit he c'honsoliñ
Ni 'vo eürus hon-daouig, gouest d'en em unaniñ

Ni a breno ur c'haier hag ul levrig bihan
'Vit deskiñ lenn ha skrivañ da gomañd hon-unan.

Ha pa vemp ni tud yaouank 'ouzout mat ar galleg
Ni 'zimezo asemblez pellañ eus ar menez

Evit gounit hor bara 'z aimp e kostez Pariz
Prenomp ur wetur dre dan evel ma 'mañ ar c'hiz.